

# AR C'HLEZEOUR

Troidigez ar varzoniez c'hallek *Le Gladiateur* gant BRIZEUX

295

'Barz ar gêr-veur a Rom. ar gêr impalaerez,  
Kant mil arvestiad a zelle gant evez,  
'Vit gwelet 'n e c'hourve ar c'haeran klezeour  
War leur ar c'helc'henva o vervel hep sikour,  
'N eur vouga c'hoaz 'n e c'houg ronkel an dremenvan  
Ha kuz d'an holl ive e boan.

Rag eno 'oa e c'bloar d'ar gourener brudet,  
'N eur renta ar vuhe, kavet e benn savet  
Ha trôtet etrezeg an nenvou lugernus ;  
Red e oa, 'vit plijout d'ar barnar ken euzus,  
Ma vije ar maro kempen ha deread  
Hep ober gloaz d'an daoulagad.

'Vel-se, Barzed santel, gant ho tiouaskel dan,  
A vale dre ar bed 'n eur skuilh hoc'h ene glan  
A-dreuz an henchou bras digor da bep hini,  
Pa varvfet dre enoe kement ha dre gozni,  
En hoc'h eur diweza, kalonek c'houi 'zavo  
Ho taouarn war-zu an Nenvo !

LAOUENANIG AR ROZ.

*Konstanza ar Mezer*